



CANTIC

68

Sant **GUENOLE**,

Quenta Abbat a gouent **LANDEVENEC**,

LAQUET E GUERS BREZONEC

CANT

J.-P.-M. LE SCOUR.

Var ton ar Regina : *En em gonsolit evit mad.*

O va brois, bezomp joaus!
Rentomp oll gloar da Zoue,
Hon alvocat dirac Jesus
Eo hon tad Sant **GUENOLE**,
Ha dindan e brotection
Querzomp oll varzu an êen.

GUENOLE, Abostol eürus
 Gloar ac enor Breiz-Izel,
 Dre eur vuez rust ha poanius
 Oc'h en em rentet santel;
 Ha ne dlefemp-ni quet ive
 O c'heulia bete mervel.

O! va brois, etc.

Allas! evel doc'h n'on deus quet
 Conservet hon innoçans;
 Souillet hon deus dre vil bec'het
 Saë gaër hon badiant.
 Pedit ma vo dre hon daëlou
 Hor pec'hejou effacet.

O! va brois, etc.

C'hui ar c'henta oc'h eus plantet
 Ar feiz e Breiz-Izel;
 Hon tadou coz oc'h eus rentet
 Christenien vad ha santel;
 Eveldo da lezen Doue
 Grit ma vimp bepret fidel.

O! va brois, etc.

Var an douar, var ar mor dôn,
 Partout e roit assistanç
 D'an nep o ped a vir galon
 Gant feiz ha gant fizianç:

An dud ac ar batimanchou

A breservit a voal chanç.

O! va blois, etc.

C'hui, pere a bartach e c'hloar,

Arc'helès eus an êvou,

Ganeomp celebrit e victoar

Ha triomf e vertusiu;

Evelloc'h e zeo bet ive,

Un Eal var an douar.

O! va brois, etc.

Landevenec, ô bro eürus!

Peguer bras eo o bonneur

Caout e relegou galloudus

D'o tifen enep malheur;

Conservit bepret gant respet

Un tensor quer precius.

O! va brois, etc.

Sant GUENOLE, ni o suppli,

Roit deomp ar c'harç er bed-ma

Da garet JESUS ha MARI

Betec hon eur diveza,

Ha ganeoc'h d'ar barados

E zaimp un deiz d'o meuli.

O! va brois, etc

Eus an evou, d'o pugale
 Roït o penediction ;
 Ni o suppli, Sant GUENOLE,
 Ac o ped a vir galon :
 Deoc'h-u, Patron carantezus,
 E consacromp hor bue.

O! va broïs, etc.

FIN.

Sant GUENOLE a voa mab da Sant FROGAN, Gouarner Breiz-Izel; e vam ar Santez VÆN, en hanvas Guen-ol-e, da lavatet eo, *ol-e-guen* (il est tout blanc), abalamour ma voa brao ha caër meurbet. C'hoas fors yaouanq en em dennas gant unnec Religius, en eur solitud anvet Tybidi; goude e zeas da Landevenec: eno e vevas evel un AEL, ac e convertissas ar c'harterze, c'hoas payen. Beza e voa mignon ar Roue Gralon, ac en laquat a reas da veza ur princ mad ha santel. Ar Sant bras-mâ a varvas e Landevenec, an drede a vis meurs, er bloaves 444, goude beza bet ur burzud a santeles ac a binigen.

E Montroulez, e ty Vor GUILMER, Imprimer ha Librer.
 (Guech-all plaç ar Pesqet, breman ru a Aiguillon.)